

KIS-730 – Denesaat ouzh skol Kyōto. II. Tanabe Hajime

(GE – 20 07 01)

TANABE Hajime (1885-1962) a voe, gant e vestr NISHIDA Kitaro¹, unan eus diazezerion ar bodad prederourion japanat anavezet hiziv evel “Skol Kyōto”. Studier e voe war ar Brederouriezh e Skol veur Tōkyō. E 1919 e voe galvet da Skol veur Kyōto evel skoriad d'ar c'helenner NISHIDA. Daou vloavezh (1922-1924) a dremenas e Freiburg ma heulias kentelioù Edmund HUSSERL ha ma voe keneil da Martin HEIDEGGER. Anvet da gelenner e 1927 e kemeras stael e vestr pa 'z eas hemañ war e leve e 1928. Diwazet e unan e 1945 ez eas da chom en un tiriad meneziek pell diouzh ar c'hêrioù bras, e Kita-Karuizawa ma kendalc'has da skrivañ ha da zegemer diskibion².

O kemer da sol studienn HIMI Kiyoshi war brederouriezh TANABE³ e tiforc'hin pevar lankad e dedroadur houmañ :

1 – Etre 1910 ha 1922, o vont diouzh erv KANT, e strivas TANABE da ren un dezvarnerezh a 'n anaout ken e domani an divezelezh, ken war dachenn skiantoù an natur ha skiantoù ar spered. E vrud evel meizour reizhiadek a dennas evezh NISHIDA ha hemañ en galvas da vezañ e skoriad.

2 – Etre 1922 ha 1934, dindan levezon HUSSERL ha HEIDEGGER, e kemeras da gentañ da bal fontañ e brederouriezh e rezh ur vedouriezh (*Weltanschauung*) divezel nemet, o tistreiñ etrezek HEGEL, ez embregas arloañ argerzh an disgorren (*Aufhebungsprozess*) ouzh ar plegennoù dibarek — bepred gant an hevelep damant d'an divezelezh ha d'ar finvezelezh.

3 – Etre 1934 ha 1943 e tizhas TANABE bezañ anavezet evel dezevour orinel ha, war un dro, e treuzas un enkadenn griz en arbenn eus durc'hadur politikel e

¹ Sl. KIS-726, La-14, pp. 217-242.

² Eno ivez emañ beziet, e tostal ar Menez Asama, dindan ur bloc'h marbr du ma lenner : “*D'ar wirionez va holc'h, dezhi hepken.*”

³ HIMI Kiyoshi, “La philosophie de Hajime Tanabe”, troidigezh diwar an alamaneg gant Bernard STEVENS, *Études Phénoménologiques (É.P.)*, n° 18, 1993, pp. 87-113.

brederouriezh hag eus ar c'hantreizhadur ergorel a c'hratae evit ur gwel d'an impalaouriezh japanat. Un doazhadur nevez a zispakas en dro d'an dodad a zezgerie evel “kemez ar spesad”. Dre an termen souezhus-se e tavee d'an hanterad daelerezh ret etre an unveziad (an den hinienn) hag an hollveziad (ar genad denel), an hanterad-se o vezañ ar *spesad*, eleze ar vloc'henn vroadel o kemer lec'h en daelerezh dre ar Stad. Ne zeuas ket a-benn avat da dec'hout diouzh enkrog kealiadurezh japanat ar mare. Dont a reas ne anavezaz mui nemet ur “spesad” en istor : Japan. En desped d'e vukadur poellel ha gwerinel e lezas an dreistbroadelourion da atoriñ e “gemez a'r spesad” evit harpañ ar bukadoù impalaerour ha kantreizhañ ar brezel argadiñ. O verzhout avat an hent gaou ma sanke, e 1942 e paouezas a embann e bleustrad war gemez ar spesad.

4 – E 1944 e teuas tre TANABE, hervez e gomzoù, en un amzervezh a azneveziñ speredel. HIMI Kiyoshi a lak ar prantad 1944-1962 eus buhez ar prederour dindan ardamez “ar fiziañs klok er Galloud Amgen¹”. Dre an anvad-se ez aroueze ar rad a-drehont, ergerc'het gant ur feiz nes da feiz an deologiezh kristen. Ken abred ha 1944 end-eeun, pa na oa ket echu ar brezel c'hoazh, e roas e Skol veur Kyōto ur steudad kentelioù dindan an titl : *Hent an azrekaat* (Jp. *zangedō*) ; ar c'hentelioù-se a yeas d'ober danvez diazez al levr a embannas e 1946 : *Ar brederouriezh evel azrekaat* [pe : *evel androouriezh*]

(Jp. *zangedō toshitenō tetsugaku*)².

Gourzhodiñ

a

rae e holc'hoù kent ha keuziñ d'e dremenad bec'hiet gant ar fazioù. Hevelep azrekaat avat ne oa e nep doare ur morc'hed trivliadel. Ur c'hwelad krennus e oa kentoc'h e tuadur e iziunadoù, un andreiñ kravezel o tifourkañ en ur vuhez nevez hag en ur brederouriezh nevez.

Tostoc'h eo modoù dezевout TANABE eget re NISHIDA d'hon boazioù kefredel a Gornogiz. Ouzhpenn se, hegersoc'h eo oberoù an diskibl, troet ma 'z int bet hogos holl en ur yezh diraezadus dimp. Aesoc'h eo enta dibab an arvezioù naouusañ, ac'hoel evidomp, eus e breder. Gant tri c'hraf e pledin : darbenn an daelerezh, kemez ar spesad, an andreiñ.

DARBENN AN DAELEREZH

¹ Jp. *tariki* a droer dre Al. *Fremde Kraft*, Sz. *Other-Power*, Gl. *Force tierce*.

² *Philosophy as Metanoetics*, tr. sz. gant TAKEUCHI Yoshinori, Berkeley : University of California Press, 1986. Jp. *zangedō* a droer dre Sz. *metanoesis*, *metanoetics*, Gl. *repentir*, *métanoïa*, *métanoétique*, Br. *azreg g.*, *azrekaat*, *andreiñ* ha *deveradoù*.

TANABE a emvataas eus degasadenn HEGEL, neoazh n'eo ket hep breutaat reizhiad ar prederour alaman. E gentañ forc'hidigezh dioutañ a voe e-keñver an “hollveziad louer”. HEGEL a veize hemañ evel kendod diwezhel¹, an dod hag ar gourzhdod o vezañ tennadoù goubarel savelet evel kealioù displegadurel eus an amparidigezh anezhañ. E se, en den hinienn n'eus tralen ebet, keñverel eo e vuhez hag e rezid, goubarel mar seller ar finvez veur a zo gwerc'helaat an Derc'h en Istor. “Ar gwerc'hennoù bev ez eo an hiniennoù hag ar pobloù, dre glask ha dre gefleuniañ o finvez piauvel, zo war un dro araezioù ha binvioù ur finvez uheloc'h, amploc'h, int dic'houzvez glez anezhi hag a werc'helaont hep rat dezho².” TANABE, en eneb — en e levr : *Finvezouriezh Kant* (Jp. *kanto no mokutekiron*) e 1924 — a zespize an hollveziad louer evel an “hollder finvezek”, eleze saviad ar bed ma revez pep tra a-geflen gant ur finvez intentet hervez buhez divezel an denelezh, anezhi finvez olañ ar grouadelezh. Moarvat e c'hell an hollder finvezek-se bezañ amgevredet gant ar reizid doueel. Hogen evit ar c'hefrediñ denel e vez kaset da benn a-zoug kamm a-dreuz d'an ober divezel unveziat, berrek bepred. E se ez eo an istor³ kefleuniadur argammedek trevn doueel ar bed. Anat e voe dezhañ e chom ar boelloniezh amoug dister d'an ober istorek intentet evel perzhiañ e gwerc'heladur an hollder finvezek : azas eo ar boelloniezh diouzh ar mont etrezek palioù, eleze davedoù ungenezh gant sol an ober ha despizadus diwarnañ ; dreist kraf dezhi eo avat ar mont etrezek finvezioù⁴ dre ma empleg ar re-mañ un trehontiñ, eleze un dizungenezh gant sol an ober hag un

¹ Sl. KIS-702, La-14, pp. 59-60.

² G.W.F. HEGEL, *Vorlesungen über die Philosophie der Geschichte*, 1837, Digoradur.

³ TANABE, alamaneger, a rae e vad eus ar c'hemm lakaet etre Al. *Geschichte* (a rojomp ni dezhañ da gentañ ar c'hevatal Br. *istor-tonkañ*, sl. Da-63, 1963, p. 53, a-raok tremen gant Br. *istor* hep mui) hag Al. *Historie* (Br. *istor-kontañ*, sl. Da-63, id., p. 52 ha *hanez*, sl. Da-63, id., p. 48) ; sl. ivez *Emsav* niv. 26, 1969, pp. 37 hh. ; *id.*, niv. 30, 1969, p. 170 ; *id.*, niv. 37, 1970, pp. 16-17.

⁴ Un divrazadur eus an argraf a voe graet war *Emsav*, niv. 34, Here 1969, er pennad : “Amkan, pal, finvez”, pp. 295-301. Ennañ e verked ervat ar c'hemm etre “bedegezh” ar palioù ha “trabedegzh” ar finvezioù. Daoust ma oa bet ebarzhet reizid an daelerezh bloaz oa, ne roe ket pennad Here 1969 ar c'heñver etre pal ha finvez evel unan daelerezhel — tremen a rae gant komz a “riskladur istorek” (p. 297). Koulskoude war *Emsav*, niv. 24, Kerzu 1968, er pennad : “An dislavar politikel”, pp. 349-353, e lenner : “Ul lod mat eus an arguzoù o ren en hon touez a denn d'ar gourzhenebadur a vez etre ar Stad hag ar gevredigezh. Evel-henn e c'haller dezrevellañ ar gourzhenebadur-se : ne c'hell an den seveniñ e rezid nemet dre ar gevredigezh ; ar gevredigezh ne c'hell padout nemet dre ar Stad ; ar Stad avat zo beli, eleze rediezh : *etre ar veli-se hag ar rezid ez eus un dislavar diabarzh*, un disvez diziren. Etre an daou vlein-se ez eus un andon diheskus a c'hourzhenebadur, hag er vaezienn a stignont e rank ar vuhez keodedel bezañ renet e stumm un daelerezh” (p. 350).

andespizadusted, un angouzout¹. O tizoleiñ HEGEL e verzhas buan TANABE ez eus gant an daelerezh gwelloc'h alc'houez eget gant ar boelloniezh evit mont tre e diorreadur an hollveziadelezh louer. Hogen ur skoilh a gavas diouzhtu war e hent : an tuadur a adanvas “evodadour” eus an “daelerezh” hegelian.

Er brederouriezh klasel e reer *evodiñ, evodadur* (La. *emanatio*, Gl. *émanation*, Al. *Emanation*) eus an argerzh a c'hoarvez, e kemm ouzh ar c'hrouiñ, eus furmidigezh ar beziadoù dre zinaouiñ diouzh ar Gentaenn, Doue ouzh o c'henderc'hañ dre un astenn eus e natur. TANABE a arzae reizhiad HEGEL dre ziskouez e tiree an daelerezh d'ur boellouriezh : mar bez roet adalek an derou ar pezh a vo kavet en dibenn, e vo argerzh a-bezh an istor kement hag emzispakadur an Derc'h, ar Spered, an Tralen hervez un hent retvezek hag e vo eus kenderc'h ar bed un evodadur na mui na maez pe, gant gerioù all, e vo eus an istor un *arunwerc'hañ*², treuzlakadur el louer eus an arunderc'hañ poelloniel.

“Hegel a venn da gentañ holl diskouez an derc'h tralen ha bezhel diouzh savboent ar reiz doueel ha da c'houde intent istor ar bed evel an dispakadur amzerel anezhañ. E zaelerezh a dalvez hepken da brouiñ ar retvez eus hollevezh Doue. E berr, distummet eo e breder en doare unelour en askont eus an dreistpouez a ro da bennaenn an derc'h ha dre se e rikel e zaelerezh en un doazhadur evodadour eus ar Spered tralen.”

“Hegel veut tout d'abord présenter l'idée absolue et éternelle du point de vue de l'intellect divin et ensuite saisir l'histoire du monde comme son développement temporel. Sa dialectique est alors utilisée exclusivement afin de prouver la nécessité de la providence divine. En bref sa pensée est déformée de manière moniste à cause de la prédominance du principe idéal et par conséquent sa dialectique donne lieu à une doctrine émanatiste de l'Esprit absolu¹.”

Evel a ouzer o doa ivez MARX hag ENGELS arzalet garv savlec'hiadur derc'helour HEGEL, dezevet ma oant da “lakaat an daelerezh war e dreid²”.

¹ Un divrazadur eus an argraf e tachenn ar yezh hag an arz 'm eus klasket ren en notenn KIS-598 – Pennaenn an angouzout, La-12, pp. 236-251.

² Sl. KIS-516 – Pennaenn an arun, La-11, pp. 51-64, p. 60 pergen.

¹ HIMI Kiyoshi, id., p. 95.

² Sl. KIS-702, La-14, p. 60. En arroud-mañ hag e kalz re all e vez graet gant Br. *dialektik* evit komz eus an *daelerezh* hervez HEGEL ha MARX. Evel henn e c'haller brastresañ “avanturioù” an

“Hogen, hervez Tanabe, e kouezhont rik en hevelep fazi. Trec'h groñs eo ganto pennaenn an danvez hag, e se, e riklont d'ur furm heñvel a unelouriezh. An hollveziadel a raklakaont evel hollded savelennoù an natur, sellet evel enmanus d'an danvez, hag argerzh an daelerezh a dremenont evel an emzispakadur retvezek anezho. Dre se emañ distummet an daelerezh etrezek un doazhadur a 'n evodiñ soliet en danvez. Savboent hennezh o tremen glan ha glez istor ar bed d'un argerzh savelek a spir skiantoù an natur d'ober meiz warnañ.

“Mais selon Tanabe ils commettent essentiellement la même faute que Hegel. Car ils attribuent au principe matériel la prédominance absolue et sont, de la sorte, pareillement tentés par une forme de monisme. L'universel est présupposé par eux en tant que la totalité des lois des sciences de la nature, considérées comme immanentes à la matière et le procès dialectique passe pour leur auto-développement nécessaire. C'est pourquoi la dialectique est déformée en direction d'une doctrine de l'émanation fondée dans la matière. De ce point de vue l'histoire du monde semble être simplement un processus nécessaire relevant du domaine des sciences de la nature¹.”

daou dermen e brezhoneg kempred : e niverennoù kentañ *Preder* e 1958 ne arvered nemet *dialektik* ; buan a-walc'h avat, er yezh komzet e teraouad ober gant *daelerezh* ; kentañ reveziadenn ar ger-mañ e *Preder* a lenner en ur pennad gant Loeiz LEMOINE : “Marv Sokrates”, TONKAD 65, kaier 72-73, 1965, p. 50 ; er bloavezhioù da heul e voe strivet da lakaat war wel monedoù daelerezhel e daou zomani : *a*) en istor hag en ober emsavel (sl. da skouer : “Kudennoù pleustrek an aozadur politikel e Breizh”, *Emsav*, niv. 11, 1967, pp.283 hh. ; “« Breiz Atao » hag an daelerezh-dieubiñ”, *Emsav*, niv. 33, 1969, pp. 263 hh. ; “Ar varksourion hag ar vroad. I.- Karl MARX. II.- Otto BAUER”, *Emsav*, niv. 38, 1970, pp. 39 hh. ; “Dafar evit istor an trede Emsav – I.- Broadelourion ar bloavezhioù pemont ha geneliezh ar saviadkenderc'hañ emsavel”, *Emsav*, niv. 53, 1971, pp. 137 hh.) ; *b*) er skiant hag er preder (sk. : KIS-065 – Notenn a-zivout an naderezh, ar meizerezh, an daelerezh, La-04, [1971], pp. 48-50). E 1973, e voe lakaet Br. *dialektik* da zistreiñ evit merkañ an diforc'h etre an “daelerezh” hegelian end-eeun hag ar meizad goveliet e brezhoneg : “Al *Dialektik*, mar bez sellet diouzh savboent ar gouiziad oc'h imbours'hiñ e ster e preder HEGEL, h.a., a vo un danvez evit an *askenderc'hañ gouziadek* ha peurliesañ (daoust ma n'eus reolenn ebet er c'heñver-se) e vo troet *dialektik* e brezhoneg ; an hevelep meizad bet pleustret gant an *askenderc'hañ nidiadek* – adalek 1967 – zo deuet buan da vezañ un danvez d'an *hontkenderc'hañ nidiadek*, ha kantreizh oa neuze dibab un termen disheñvel diouzh *dialektik* : *daelerezh*”, in “Kendael a-zivout istor kealiadurezh al luskadoù breizhek. XIII.- Ar sturyezhouriezh eus an eil d'an trede Emsav”, *Emsav*, niv. 81, 1973, p. 311.

¹ HIMI Kiyoshi, id., p. 95.

O tisteurel an daelerezhioù hegeliek koulz ha marksek na oufent nemet disoc'h d'an un doazhadur unelour a 'n evodiñ, e strivas TANABE da zizoleiñ anien an daelerezh diles — eleze ar c'heñver dialuskel, kefluskel, etre dremmwel ar finvez ha kerzh an istor. Feal da KANT, e talc'has da zarbenn an hollder finvezek evel an hollveziad louer. Penaos avat savelañ hevelep hollder finvezek evel pennaenn gendodiñ en ur hepkoriñ an unelouriezh derc'hel pe danvezel ? E holc'h a zegouezhas gant an “na-vout tralen”, meizad ergrafet gant NISHIDA. Kentoc'h eget a amprest e tere komz a gengerc'h. Kemez piaouel e zehentadur a reas dezhañ anaout an na-vout tralen evel an termen azasañ da aroueziñ an hollveziadel daelerezh. Ezvezant e vez an hollder finvezek n'eo ket hepken en danvez, met ivez en derc'h — evel hollveziad louer ne vez ket roet, met holc'het a-dreuz kerzh an istor. A se ez emgav gourzhodet an damgenster darbennet tavedek gant preder Kornog etre *louer*, *bezant* ha *danvezel*. Amañ e splanna ar c'hemm etre dezevout TANABE ha dezevout HEIDEGGER. Hemañ eo ar *bout* blein e holc'h. Pennaenn an daelerezh evit TANABE eo an *na-vout* : an hollder finvezek, an hollveziad louer zo na-vout danvezel en hon bed a ezvezañs, zo ivez na-vout derc'hel en hon aoz a angouzout — eleze *na-vout tralen*. War-benn lakaat kemm etre an daelerezhioù unelour a erlec'h ouzh ar finvez pal ur *bout derc'hel* pe ur *bout danvezel* hag an daelerezh diles a zo dezhañ da bennaenn an *na-vout tralen* (*derc'hel* ha *danvezel*), e reas eus hemañ diwezhañ an *daelerezh tralen*.

KEMEZ AR SPESAD

Keal an na-vout adkemeret gant NISHIDA eus an hengoun boudaat a voe treuzlakaet gant TANABE er preder arnevez. Evit NISHIDA ez eus diasarded etre bout ha na-vout ha *diac'hinek* eo o dislavar : tennañ a ra da zanken ur gweladur diasavek, kelc'hiennek eus devoned ar beziat ; komz eus “bevañ istorek¹” hag ober, ent voudaek, eus an istor ur perzh retvezek, hollek eus an traoù bev. War un dro avat ez intente NISHIDA, ent hegeliek, an istor evel ar c'hefleuniadur (debarzh, dibarek) eus davedelezh ar bed gant Japan herouezet “e penn diorreidigezh ur sevenadur hollvedel²”. TANABE ne asantas ket da hevelep frailh e doazhadur e vestr ha diwar neuze ez eas war ziaesaat an darempredoù etrezo. Ouzhpenn HEGEL, en doa lennet MARX aketus. Rebech a rae da NISHIDA e duadur da emgantañ e micher an dezevour, e savlec'h an arvester diseblant ouzh an ampar embregel eus gwerc'helezh istorel, kevredigezhel hag armerzhel buhez e bobl. Haeriñ a rae ez eo ar *praksiz* (an embreg, Jp. *jissen*, an ober, Jp. *kōi*, Al. *Tat*) amplegad ar c'hejañ gant gwerc'h ar vuhez hag ez

¹ Sl. KIS-726, La-14, p. 238.

² Sl. KIS-726, id., p. 239.

a d'ober al load dilesañ, ar poent loc'hañ end-eeun eus ar brederouriezh. An un damant a reas da TANABE arzaelañ emzalc'h HEIDEGGER dirak ar galloud nazi ha tamall dezhañ e ezvezañs a zassellerezh politikel.

Kentañ aters a ra TANABE outañ e unan eo : “Penaos e c'hallan perzhiañ en istor ?” Eil aters : “Pelec'h emañ leurenn an istor ? En denelezh ? En hinienn ?” Ha stagañ da arzaelañ ar meizadur poelloniell a ra eus an denelezh lec'h an anien hollveziat, ar poell ; a laka an kez anien da zisoc'h, dre spesata argammedek, gant ar beziadoù unveziat ha se hep lamm doareadel. Hervez hevelep meizadur e ve an hiniennoù kement ha diskejennoù ungenezh, skouerennoù eeun eus un anien hollek, hollveziat hag ez afe ar stollennoù diseurt o vodañ hiniennoù d'ober ur par dibarek, hanterad eeun etre an daou bar eizhañ, hollveziat hag unveziat ; e se, ne ve d'ur gevredigezh perzh solwezel ebet he diforc'hfe diouzh unan all, a virfe outi a gendeuziñ gant nep kevredigezh all pe gant an denelezh hollveziat. Hervez TANABE, hennezh eo gweladur hengounel Europa ; dre an hent-se avat ne dizher nemet ur meizadur ankevasas eus *Dasein* kevredigezhel mab den. Rak ar bed gwerc'hel a c'hoarvez eus bloc'henoù, kevredigezhioù dibarek ganto pep a endalc'had yaek piaouel ha na c'haller ket dre se diren da hennadoù deberzhed. Ha TANABE ha diskleriañ ar c'hentread : ar vloc'henn zo unvez vonel ar vuhez ; ar vloc'henn zo ur “gevredigezh spesadek”, ur gevredigezh soliet evel “spesad”. Diwar se ne c'haller mui sellout an hiniennoù evel unveziadoù unvan hag ungenezh. Eus ar spesad e tenn a-gentouez pep hinienn endalc'had dibarek he buhez. An devoud-se a ranker stadañ da gentañ penn pa arseller an *Dasein* en e ampar kevredigezhel. Alese an ezhomme da savelañ ur “gemez a r spesad”.

“E dargemm ouzh ar boelloniezh, a savlec'h rummenn ar spesad dindan ar genad ha dreist an hinienn hag a hañval keflezel ganti ur roll mavek hep mui war-benn ober meiz war diseurted an dibaregezhioù gougevret ouzh an hevelep renk hollveziat, e kinnige Tanabe intent ar spesad evel seulad an Existenz¹ denel he unan, evel diazez d'ar « youl vevañ ». Amkanet oa da erlec'hiañ un haeradenn yaat eus roll peurzalc'hus ar spesad ouzh steudad an nac'hadoù a wele danzeet gant Hegel, a rae d'an hinienn tremen a-dreuz spesadelezh an istor etrezek un hollveziad trehontus. Gant

¹ An droerion c'hallek ha saoznek ne gredont ket reiñ kevatalioù en o yezh d'an termen japanek bet troet a du 'rall gwech dre *Dasein*, gwech dre *Existenz*. Evelto e kavan furoc'h, amañ evel a-zioc'h, derc'hel an termenoù alamanek eget ober, lakaomp, gant *bezoud*, *buhez*, *hanvoud*, *menev* keit ma chom amspis din ster an termenoù arveret gant TANABE.

gerioù all, evit ober reiz war luniad diazez hon emskiant, ne spir ket stadañ omp bet ganet evel hiniennoù er ouenn denel ha da c'houde treiñ ouzh un anadenouriezh² eus hon denezh c'henadel ; n'eo ket a-walc'h kennebeut astenn hepmuiken d'ar c'hevredigezhioù spesadek istorel un anadenouriezh eus an argerzhioù o wezhiañ war hiniennaat an talvoudoù trehontel pe hollekaet (hervez doare, lakaomp, Kulturwissenschaft³ Rickert pe Geisteswissenschaft⁴ Dilthey). Spesadegezh louer ur meuriad pe ur bobl pe ur vroad zo estreget ur sil derc'hel e feson ar pezh a rae Hegel yaouank un « dec'hmegad broadel » anezhañ. Bez' ez eo an diazez kentizhekañ eus bout an den, un tued kentizhek, furmel na revez ket e unan met a ampar un dindanad louer ma werc'hela ent furmel drezañ an hinienn he genezh en istor.

“E-lec'h ma klask Hegel ha Marx loañ ar boellezh en ur seulad genadel a spered pe a zanvez oc'h emzanzen e unan en istor, e teraou spesad Tanabe a-ziwar un anpoell boniek a c'hoant bevañ pur loet e mezon emskiant mab den, ur c'hoant termenet gant an amveziadoù kevredigezhel.”

“In contrast with traditional logic, which places the category of species below genus and above individual, and seems to deny it anything but an ancillary role in order to account for the varieties of particulars belonging to the same universal class, Tanabe proposed that species be understood as the substratum of human Existenz itself, the ground of the « will to life ». His aim was to replace the series of negations he saw worked out in Hegel, in which the individual is made to pass through the specificity of history to a transcendent universal, with a positive affirmation of the permanent role of species. In other words, to account for the basic structure of consciousness, it does not suffice to state that we are born as individuals into the human race, and then turn to a phenomenology of our generic humanity ; nor is it enough simply to carry on a phenomenology of the processes operative in the individua-

² Loazioù ar brezhoneg hon c'hevaraez da lakaat kemm etre *anadennoniezh*, skiant hollek an emouezañ evel amparer an anadennoù, hag *anadenouriezh*, studi deskrivadurel ur rumm anadennoù evel m'o c'hantouezer.

³ A-zivout ar *sevenadoniezh*, kevatal brezhonek kinniget d'an termen alamanek-mañ , sl. NOTENNOU KEVREDADEL, “Brastres istor ar Gevredadouriezh III”, *Emsav* niv. 59, 1971, pp. 355 hh., p. 359 pergen.

⁴ A-zivout unan eus sterioù an termen alamanek-mañ, sl. KIS-529, La-11, p. 150.

lizing of transcendental or generalized values in specific historical societies (after the manner, say, of Rickert's *Kulturwissenschaft* or Dilthey's *Geisteswissenschaft*). The concrete specificity of a tribe or people or nation is more than a theoretical filter after the manner of what the young Hegel called a « national imagination ». It is the most immediate ground of human being, an immediate, formal disposition not existing itself but forming a concrete substrate in terms of which the individual formally actualizes its genus in history.

“Where Hegel and Marx seek to locate rationality in a generic substratum of spirit or matter working itself out in history, Tanabe's species begins from a radical irrationality of pure desire for life at the core of human consciousness, a desire defined by social conditions¹.”

Diwar vont, merkomp ar skoemp e oa, en ur riez o tanzen aloubiñ he rannved, un doazhadur evel hini ar “spesad”. Karezet e voe TANABE ken gant ar gostezenn vroadelour a damalle dezhañ an dave a rae d'ar boellelezh, ken gant an enebroadelourion a rebeche dezhañ bezañ kevredad ergorel d'an impalaerouriezh.

“Tanabe a felle dezhañ despizañ ar spesad evel ur seurt a gentelv gevredadel a ziverzher splannoc'h e-barzh an argeloù oc'h unaniñ ur gevredigezh e-giz ar skeudennadur totemel a gawe studiet en oberoù Lévy-Bruhl eget e nep eztaol hiniennel rik.

“Aes eo gwelout penaos, diwar seurt diazez, e ranke Tanabe anzav un dalvoudegezh yaek gant darbennadur impalaer Japan evel argel eus neveded ar vroad. N'eo ket diaes kennebeut avat empentiñ penaos e c'halle hevelep diskleriadurioù bezañ treuzsteriet, evel ma voent en devoud ken gant ar gefredourion adubroadelour a-raok hag e-doug ar Brezel Bras¹, ken gant arzaelerion ar vroadelouriezh da c'houde. Koulskoude, arc'hwiliad leal ebet eus doazhadur Tanabe war gemez ar spesad ne c'hell tremen hep anaout e oa dezhañ da bal un “damkaniezh eus ar bezoud broadel” he dije talvezet da zezvarn war eeun ar vroadelouriezh dall a wele oc'h atizañ engwezhiadurioù Japan en Azia hag ar faskouriezh en Europa. Oc'h amprestañ an digemm-

¹ James W. HEISIG, Foreword to TANABE Hajime, *Philosophy as Metanoetics* (*zang edō toshite no tetsugaku*), translated by TAKEUCHI Yoshinori with Valdo VIGLIELMO and James W. HEISIG, University of California Press, 1986, p. xvi.

¹ “*The Great War*” a arouez amañ an eil Brezel bed.

adur graet gant Bergson e Div andon an divezelezh hag ar gravez² etre kevredigezhioù « digor » ha « serr », e strive da ziskouez penaos ur gevredigezh diazezet war « serridigezh ar spesad » a suj ur ouenn pe ur bobl dibarek da anpoell he dibaregezh dre he zroc'hañ krenn diouzh he nesaelezhioù gant an denelezh c'henadel³ pe dre vrellañ ent kealiadel an diforc'hiñ [etre genad ha spesad] (arzaelañ a rae genad-broad Hegel ha « keodedour a 'r bed » Kant), ha penaos hepken gant « digoridigezh ar spesad » d'ar genad dre handizh daelerezh ar boellelezh ez eus goanag da herouezañ ar rezid en istor.”

“Tanabe wanted to define species as a kind of social archetype that is more clearly visible in the uniting symbol of a society, such as the totemic imagery that he found treated in the works of Lévy-Bruhl, than in any purely individual expression.

“It is not hard to see how, on this basis, Tanabe should come to see a positive significance in acknowledging the emperor of Japan as a symbol of the sacredness of the nation. But neither is it hard to see how such statements might be misinterpreted, as in fact they were both by nationalist-minded intellectuals before and during the Great War and by critics of nationalism after it. No fair account of Tanabe's logic of species can fail to see, however, that its goal was a « theory of national existence » that would serve as a direct critique of the blind nationalism he saw inspiring Japan's engagements in Asia and fascism in Europe. Taking the distinction between « open » and « closed » societies from Bergson's *Two Sources of Morality and Religion*, he strove to show how a society based on a « closing of species » subjugates a particular race or people to the irrationality of its particularity, cutting it off from affinities with generic humanity or blurring the distinction idealistically (his criticism of Hegel's genus-nation and Kant's « world citizen »), and how only an « opening of species » to genus through the dialectical mediation of rationality has any hope of promoting freedom in history¹.”

² Henri BERGSON, *Les Deux Sources de la morale et de la religion*, 1932.

³ Ar c'herienn digunvez-se a arveran evel ma ra J.W. HEISIG gant *generic humanity* evit kemplegañ d'ar c'hevenebadur lakaet gant TANABE etre ar spesad ez eo ar vroad hag ar genad ez eo an denelezh en he fezh.

¹ James W. HEISIG, id., pp. xvi-xvii.

O reiñ ur staelad prederel d'ar spesad (meuriad, pobl, broad) e stigne TANABE kudennoù niverus e domanioù ar brederouriezh hag ar politikerezh. A se ar savlec'h amjestr e oa deuet da vezañ e hini dre loc'hañ ha pellaat diouzh HEGEL, HEIDEGGER ha NISHIDA, koulz ha dre loc'hañ ha pellaat diouzh ar gealiadurezh o ren en e vro.

Ent prederouriel, ar spesad, etreat d'ar genad, lec'h ar poell, ha d'an hinienn, lec'h ar rezid, zo anpoellek hag anrezidek, deberzhiek. Hogen galvet eo da vezañ hanterad etre an daou bar eizhañ ; drezañ an hinienn a handizh ar poell, ar genad a handizh ar rezid.

“Leunded ar poell a ampleg n'eo ket hepken ez embregfe an hinienn he rezid a-ziwar he deberzh met ivez ma emlakafe rez e sell d'he deberzh, ha se ne c'hell bezañ kefleuniet nemet a-dreuz nac'hadur tralen ar poell. O handizhañ dre « youl da vevañ » he deberzh spesadel ez embreg an hinienn « youl da c'hallout » he rezid unveziadel, hag a-geveskemm. [...] Ar gudenn bennañ oa savelañ sol ar c'henniñv hag an handizhañ keveskemm etre spesad ha hinienn. Engouestl Tanabe er boellelezh a virfe outañ a gavout seurt diazeze en anpoell tralen, pezh en defe da wered fraostaat savlec'h ar gouzrec'h hiniennel ha berzañ e rezid. Hogen ne c'hallfe ket e gavout kennebeut e poellelezh tralen ar gouzrec'h rez, pezh en defe da wered anistorekaat an hinienn. Dre se e teuas da gomz eus ur bennaenn a emaralladur¹ e mezon kement tra 'zo. Lakaet ent furmel, e talvez e tisoc'h tralended an handizhañ tralen eus ar fed penaos an handizhañ etre hinienn ha spesad e buhez mab den zo handizhet e unan gant dic'hallusted hollek ar bezout anhandizhet. N'eo ket hepken e ve engwezhiet ent daelerezhel an daou ampar an eil gant egile dre berzh un dibab rez eus ar gouzrec'h, met nag an eil nag egile ne c'hell bezañ ar pezh ez eo nemet e termenoù un dislavar diabarzh bonel : evit bezañ ar pezh ez eo, e rank an eil perc'hennañ e unan egile, nad eo ket. N'eus spesad ebet hep hinienn, na hinienn hep spesad — e berr, n'eus netra anhandizhet e bed mab den, ha da heul, unded werc'hel ebet kefleuniadus etre keveneboù. N'eo ket hepken an hinienn met ivez ar spesad a c'houzañv emaralladur ur c'hoant

¹ En troidigezhioù alamanek e kaver arveret amañ an termen *Selbstentfremdung* a glotfe a-walc'h gant Br. *emestrenadur*.

d'ar bezoud handizhet, c'hoant gouhebet dre berzh an arc'hadoù handizhañ loue.”

“The fullness of reason demands not only that the individual exert its freedom *from* its contingency but also that it make itself free *for* that contingency, and this can be accomplished only through an absolute negation of reason. In mediating the « will to life » of its specific contingency, the individual exercises the « will to power » of its particular freedom, and vice versa. [...] The key problem was to ground the conflict and mutual mediation of specificity and individuality. Tanabe's commitment to rationalism would not allow him to find such a ground in an absolute irrationality, since that would effectively sterilize the position of the individual subject and disallow its freedom. But neither could he find it in the absolute rationality of the free subject, since that would effectively dehistoricize the individual. He therefore came to speak of a principle of self-alienation at the core of *everything* that is. Formally put, this means that the absoluteness of absolute mediation stems from the fact that the mediation between individual and species in human life is itself mediated by the general impossibility of unmediated existence. It is not just that the two dimensions are engaged dialectically with each other as a result of the free choice of the subject, but that neither can be what it is except in terms of an essential internal contradiction : to be what it *is*, it must appropriate to itself the other, which it *is not*. There is no species without individual, no individual without species — in short, nothing unmediated in the human world, and therefore no actual achievable unity of opposites. It is not only the individual but also species that suffers the self-alienation of a desire for unmediated existence frustrated by the concrete demands of mediation¹.”

En ul lavar divoas emañ aze displeget ar c'hudennadur a anavez mat diorreerion ar brezhoneg. Bezañ Breizhiz zo un devoud a “spesad”, embreger o rezid dre ziorren ar brezhoneg zo un devoud a hinienn. Kenniñv zo etre bezañ Breizhad ha diorren ar brezhoneg ; war un dro, dre ar vreizhadelezh e handizher an diorren brezhoneg hag a-geveskemm. Bezañ Breizhad zo un devoud deberzhedek n'en deus ket ar poell da sol. Padal, ober eus ar vreizhadelezh un anpoell tralen a ve fraostaat ar savlec'h a vrezhoneger (diboell ez afe neuze diorren ar yezh e dremmwel ur gevredigezh vrezhonek) ha berzañ rezid an diorreer. Hogen reiñ da ziorreadur ar brezhoneg staelad ur poell tralen (diren ar yezhañ d'un trevnad dezvoù diwar ur bon retvezek, ober

¹ James W. HEISIG, id., *ibid.*, pp. xvii-xviii.

anezhañ ur reizhiad darbenn-dezren) a gasfe d'un hevelep fraostaat savlec'h ha berzañ rezid. Un dislavar diabarzh bonel zo, a zezgerier evel henn : ar vreizhadelezh evit bezañ ar pezh ez *eo* a rank perc'hennañ an diorren brezhoneg *nad eo ket* (nad eo ket, dre berzh pennaenn an estreded² — dislavar a chom dianav d'al luskadoù breizhek) ; an diorren brezhoneg evit bezañ ar pezh ez *eo* a rank perc'hennañ ar vreizhadelezh *nad eo ket* (nad eo ket, nann pa 'z eo galloudel c'hoazh ar “spesad” Breizh, met dre berzh pennaenn an estreded bepred — dislavar a voe dianav da ESB). E berr, o reiñ ur furm daelerezhel d'al ligan kozh : “Hep brezhoneg, Breizh ebet”, e tegouezher gant : hep diorren yezh, diorren bro ebet hag a-geveskemm. An eil a handizher dre egile, dic'hallus eo avat ober un unded anezho : an daou a chom kevenep, kevestren — emarallaet.

O tedalvout triad an daelerezh hegelian, e tebarzh TANABE d'ar genad lec'h ar c'hendod disgorreet diwar an dislavar etre an dod ez eo ar spesad hag ar gourzhdod ez eo an hinienn. An disgorren, o tougen d'ar genad arvez gwerc'hel-danvezel ar spesad hag arvez derc'hel-rezidel an hinienn, a zisoc'h en ur gevredigezh a zo war un dro dibarek, deberzhek enta, ha war hollveziadekaat : ganti ul lañs durc'haet d'an tralen, e tispak holl skourroù an hollveziadelezh : sevenadur, divezouriezh, gwir, ensavadurioù, h.a. TANABE a c'hougevred ar genad er furm-mañ dindan meizad ar “Stad” : ar Stad zo gwerc'heladur ar genad, an hollveziad ha, dre se, e c'haller komz a “gevredigezh digor”. Padal, e vez dalc'hmat tennderioù etre an tuadur hollveziadek ha dibaregezh ar spesad. Mar paouez an disgorren a c'hoarvezout en daelerezh spesad-hinienn, ez a ar gevredigezh digor d'ur gevredigezh serr, e tic'henezh ar Stad eus renk hollek ar genad da renk dibarek ar spesad hag e teraou mac'homañ an hiniennoù diwar-bouez ur gwir hag ensavadurioù na anavezont nemet hevelepted ar spesad. An kez dic'henezhiñ eo a ra TANABE anezhañ “emarallaat ar genad”. An handizhañ etre spesad ha hinienn a baouez a arc'hwelañ hag ez a ar spesad da gentizhek dre ma 'z eo freuzet e geñver daelerezhel ouzh an hinienn hag ur c'heñver a zistruj ne c'hell ken bezañ etre ar Stad hag an hiniennoù.

“Hep mar ebet, pezh a ambrede Tanabe pa rae kel a « spesad » oa, da gentañ penn, ar bobl pe, dikoc'h, ar vroad. Dav dimp anaout e oa e gemez a'r spesad un argeziad prederel gwirion evit dezgeriañ emgenskiant Japaniz arnevez engwezhiet a-zevri da sevel ur Stad-vroad diwar batrom Europiz. E gwir, ouzhpenn ur bobl a Europa o doa adeiladet o Stad-vroad dezho en oadvezh arnevez hag he herouezet da renk an damanioù bras. Ar berzh o doa graet a zlee broudañ Japaniz d'ober evelto. Hogen gant ar

² War se, sl. KIS-728, La-14, p. 258, n. 1, enni daveoù all.

brederouriezh europat arnevez edo al lusk da sevel ar Stad-vroad stag dreist-holl ouzh emgenskiant ar gouzrec'h hiniennel. Er c'heñver-se e tleomp lavarout ne oa ket dik tre meno Tanabe pa lakae e rae diouer ur meizadur a 'r spesad da hengoun prederel Europa. Rak, a dra sur, prederouriezh europat an Amzerioù Modern ne c'halle ket dianaout dibaregezh ar vroad en askont ma oa bet ganet e kreiz tre argerzh adeiladiñ ar Stad-vroad. Da skouer, e prederouriezh Hegel, e oa ur roll resis gant meizad spered ur bobl (Volksgeist) evel derc'haller istor ar bed evit un oadvezh lavaret. Padal, er mod dezevout europat e veze ar pouez dreist gant an emskiant ouzh hollveziadegezh an anien boellel. Dre se e hañvale bezañ anat e ve d'ar Stad krouet gant ur bobl dibarek trevonnañ he bevennoù ha gwerc'helaat d'an diwezh enni he unan hollveziadegezh mab den, kement-se evit gwir a felle da Tanabe nagenniñ. En doare-se end-eeun e teselle Hegel Stad arnevez ar vroad alaman evel gwerc'heladur kevazas derc'h ar rezid, ma tlee ennañ spered ar bobl alaman unaniñ gant spered ar bed ha ma tlee istor ar bed finvezañ.”

“Il est hors de doute qu'avec la désignation d'« espèce » ce que Tanabe avait en tête était bien, en premier lieu, le peuple ou, plus exactement, la nation. Et nous pouvons concéder que sa logique de l'espèce représentait une véritable tentative philosophique de formuler la conscience de soi des Japonais modernes qui étaient occupés à construire un État-nation d'après le modèle des Européens. De fait plus d'un peuple européen avait construit son propre État-nation à l'époque moderne et l'avait mené au rang de grande puissance. La réussite de ces pays devait faire de ceux-ci un objet d'imitation pour les Japonais. Or la philosophie européenne moderne exprimait en général la conscience de soi du sujet individuel au sein du mouvement de construction de l'État-nation. Dans cette perspective nous devons dire que l'opinion de Tanabe n'était pas tout à fait juste, selon laquelle une conception de l'espèce faisait traditionnellement défaut à la philosophie européenne. Car la philosophie européenne des Temps Modernes ne pouvait naturellement pas manquer de connaître la particularité de la nation dans la mesure précisément où elle était née au sein même du processus de construction de l'État-nation. Par exemple dans la philosophie hégélienne le concept de l'esprit d'un peuple (*Volksgeist*), en tant que représentant de l'histoire mondiale pour l'époque donnée, jouait un rôle précis. Mais dans le mode de pensée européen c'était

nettement la conscience de l'universalité de l'essence rationnelle qui avait le plus de poids. C'est pourquoi il semblait évident que l'État créé par un peuple particulier dépassât simplement ses limitations et réalisât finalement en lui-même l'universalité de l'homme, ce que Tanabe voulait en fait contester. C'est ainsi que Hegel considérait l'État moderne de la nation allemande comme une réalisation adéquate de l'idée de liberté en soi, en laquelle l'esprit du peuple devait s'unir avec l'esprit du monde et où l'histoire du monde devait s'achever¹.”

Er poent-mañ eus dehentadur TANABE e spurmanter diwan ur gwariadur. Daelerezh diles eo stadañ an dislavar bonel a zo etre an hinienn hag ar spesad hag ober stad eus an disgorren o tisonc'h gant ar genad e par an hollveziadelezh. Risklus oa endeo mont da heul HEGEL hag ober eus ar Stad gwerc'heladur an hollveziadelezh. Padal, dre m'en doa diskuliet evodadouriezh HEGEL hag an dezenn a rae eus ar Stad alaman pengennadur treug an Derc'h hag an Istor, edo TANABE en araez da anaout liested ar Stadoù er bed evel poent loc'hañ un daelerezh nevez durc'haet d'un hollveziadegezh a zerez uhelañ, hollvedel. Pezh a reas da gentañ, met a-nebeudoù e lezas e zremmwel da strishaat hag e kouezhas en ur meni hegeliadegezh arloet da Japan.

*“Evel stil dezевout prederouriel e pourchas dimp kemez ar spesad elfennoù e-leizh evit sklaeriañ savidigezh ar Stad-vroad hag e tle a-gantrevn kas da anzav liested ha keñverelezh ar Stadoù-broad. Evit gwir diouzh un tu ez eo pep Stad ur gevredin-
iezh (Al. Gemeinwesen) hollveziadelaus, met diouzh an tu all e vez enni naouusterioù an dibaregezh e kement ma 'z eo diazezet war un unvez a rezh d'ar spesad. Da heul ez eus Stadoù diseurt dre ar bed hag o c'henvezañs a ya d'ober an denelezh a-bezh. Devoud hennezh he dije kemez ar spesad dleet ha gallet stadañ. En dro-se nepred n'he dije bet d'ober gant hollveliekaat ur Stad dibarek.*

“Gwir eo neoazh n'en deus ket Tanabe d'an diwezh gallet tremen hebiou da hollveliekadur e Stad dezhañ. Evel se eo e teuas a-benn ar fin da sachañ war e gein ur bec'hiad disoc'hoù iskis dislavarus d'e vukadur poellelour eus an derou. D'hon meno, ur seurt digantrevn a denn nebeutoc'h d'un diouer a ergrafañ en e vinviadur dezевout eget d'ur barenn vredel. An arbenn eo ez emgavas Tanabe enket er strizhder spered a oa neuze boutin koulz

¹ HIMI Kiyoshi, id., pp. 99-100.

lavarout gant Japaniz hag, o vont a-rekin d'e vennadoù kentañ, e lakaas e gemez a'r spesad en arempred ar rakvarn genelel. E berr, ne welas ken nemet ur spesad ha nemet ur Stad. Mont a reomp betek lavarout ne oa mui ar « spesad » evit Tanabe netra estreget un dic'harvad evit unvez kenelel broad Japan hag ar « Stad evel ōgensonzai ("Stad [evel erzerc'hadenn rez ar genad pe an tralen] bewech hervez an dro") » un dic'harvad evit aroueziñ Stad Japan. Evel m'hon eus gwelet en doa kroget da zodennañ seulad emgenskiant kenelel Japaniz. Hañvalout a ra din avat ez eo e-barzh ar c'hudennadur-se end-eeun e vanas maoliet. Kentoc'h eget dodañ Japan evel ur spesad etre re all, e kanmeulas he zalvoudegezh hep he far, dre ma ne oa ket evit diskar ar voger gealiadel a vac'he an emskiant japanat arnevez. [...]

“Ar bevennadur dangorel en doa gouzañvet Tanabe evel Japanad arnevez a gasas e breder war un hent dall en diwezh. N'eo nemet dre zisgorren (aufheben) ar bevennadur-se e voe gouest da brederouriañ en-dro. Pa c'hoarvezas an kez disgorren da vat, e santas edo adenaouet ennañ ar vuhez gant ar Galloud Amgen a-drehont. Setu dres perak e roas d'an derou nevez eus e brederouriezh an anv « hent an azrekaat » pe « androouriezh ».

“En tant que style de penser philosophique la logique de l'espèce nous offre beaucoup pour éclairer la construction de l'État-nation et elle doit de manière conséquente conduire à la reconnaissance de la pluralité et ainsi de la relativité de l'État-nation. Chaque État à vrai dire est d'une part un être-commun (Al. *Gemeinwesen*) universalisant, mais contient d'autre part les caractéristiques de la particularité pour autant qu'il se fonde sur l'unité qui est à la mesure de l'espèce. Il s'ensuit qu'il y a divers États de par le monde dont la coexistence constitue l'humanité entière. La logique de l'espèce aurait dû et pu constater ce fait. Dans ce cas elle n'aurait jamais eu affaire avec l'absolutisation d'un État déterminé.

“Et pourtant il est bien vrai que Tanabe n'a finalement pas pu éviter l'absolutisation de son propre État. C'est ainsi qu'il en arriva finalement à être accablé par les résultats bizarres qui contredisaient sa vision originellement rationaliste. D'après nous cette inconséquence est à rapporter moins à un manque dans l'équipement conceptuel de sa pensée elle-même qu'à un facteur psychologique. C'est que Tanabe fut victime de l'étroitesse d'esprit qui était en quelque sorte commune aux

Japonais d'alors et, allant à l'encontre de ses intentions initiales, il mit sa logique de l'espèce au service du préjugé ethnique. En bref, il ne considéra plus qu'une seule espèce et un seul État. Nous pouvons aller jusqu'à dire que pour Tanabe « l'espèce » n'était plus rien d'autre qu'un euphémisme pour l'unité ethnique de la nation japonaise et « l'État en tant que *ōgensonzai* ("État [comme manifestation libre du genre ou de l'absolu] chaque fois selon le cas)" » qu'un euphémisme pour dire l'État japonais. Comme nous l'avons vu il avait commencé à thématiser le substrat de la conscience de soi ethnique des Japonais. Mais il nous semble que c'est précisément dans cette problématique qu'il est resté empêtré. Plutôt que de poser le Japon comme une espèce parmi d'autres, il glorifia sa signification irremplaçable, car il ne pouvait pas renverser le mur idéologique qui enfermaient la conscience japonaise moderne. [...]

“La limitation qu'avait subie la subjectivité de Tanabe, en tant que Japonais moderne, conduisit finalement sa pensée philosophique dans l'impasse. C'est seulement par le surmontement (*Aufhebung*) de cette limitation qu'il put être en état de philosopher à nouveau. Lorsque se produisit réellement un tel surmontement, il se sentit rappelé à la vie par la Force Tierce transcendante. Et c'est précisément pour cette raison qu'il désigna le nouveau commencement de sa philosophie du nom de « chemin du repentir » ou « métanoétique »¹.”

O vale war roudoù TANABE hon eus divrazet doareoù un daelerezh etre spesad (evit derc'hel termen ar prederour japanat) ha hinienn, skoueraet evit a sell hon degouezh gant an dislavar etre diorren bro ha diorren yezh, dislavar bonel a reer meiz warnañ dre bennaenn an estreded, dezgeriet c'hoazh evel pennaenn an ankeñver². A urzh all eo an dislavar etre hinienn ha spesad diouzh un tu ha Stad diouzh an tu all. Lakaat a ra TANABE e vez kendodet ar genad (an hollveziadelezh, gwerc'helaet gant ar Stad) dre an disgorren eus an dislavar etre hinienn ha spesad. Ar Stad zo galloud hag he c'hantreizh eo bezañ galloud en arempred ar poell. Hag eñ zo ar poell avat dre wir en araez d'ober meiz war gement a sell ouzhimp ? Lakaomp ez eo ar poell anien an hollveziadelezh ; hag eñ zo hollveziadelezh kement a sell ouzhimp ? Nann, hag eno koulskoude edo e kerz TANABE danvez ar respont : e-maez amgant ar poell emañ an na-vout³. Nann an

¹ HIRI Kiyoshi, id., pp. 107-108.

² Sl. KIS-693, La-13, p. 396.

³ A-zivout an hent a-stur heuliet gant HEIDEGGER evit diskleriañ emañ “argraf an Nedev e-maez krap ar Boelloniezh”, sl. KIS-706 – Al. **Nichts** e preder Heidegger, La-14, pp. 92-115, pp. 94-95 pergen.

anvoud hegeliek, keal keñverel ampleget gant an devoned etrezek ur finvez evodat⁴, met an na-vout tralen, oc'h amplegañ an angouzout, e unan amplegad ar rezid. Eno emañ, n'eo ket an dislavar, met an ankeñver etre ar poell hag an na-vout tralen, etre galloud hag angouzout, etre Stad ha rezid. Ar rezid zo treiñ kein d'ar beziat ha pa ve hollveziat, d'ar Stad, d'ar poell. An estreded hon eus dinoet etre yezh ha yezher, etre diorren yezh ha diorren bro, mar menner he deskrivañ evel un daelerezh, ne zifourk nepred an disgorreadur anezhañ er rummennoù kent, met bepred en digent — e beziadoù digent a nebantor dre o sankañ a eil lank er rummennoù kent evel “greadoù strollennel birvidik - nevezin ha -krouin¹”. Er rezid, hon eus anvet ivez *nit*, emañ gwizienn pep estreded, an estreded tralen. Harzek eo enta galloud ar Stad ha, ma ne c'hell ket keal ar *rezid* kaout lec'h e kealiadur ar Stad, e vez sanket tre ennañ e rezh nebantet ar *frankiz* o vevennañ he galloud, ha se diwar-bouez stourmoù bepred aznevezet.

An darempredoù kenniñvek o ren en hon amzer etre ar galloud Stad² hag al luskadoù a stourm evit ober dezhi darbenn ar brezhoneg d'he yezh zo andoniet er “greadoù nevezin ha krouin” o deus herouezet ar brezhoneg da renk ar gwir yezhoù. Dre an hevelep argerzh ma rankas ar Stad hollveliek gouzañv ar bonnoù lakaet d'he galloud gant gourzhgalloud emgannerion ar frankiz — andon houmañ, ar rezid, o chom ankeñver ouzh nep galloud ha pa ve galloud Stad pe gourzhgalloud — e ranko ar Stad unyezher leuskel un tamm all eus he galloud gant gourzhgalloud ar stourmerion allyezher — an un rezid, arbenn an dilested anezho, o chom ankeñver bepred ouzh galloud evel ouzh gourzhgalloud.

AN ANDREIN

Kentañ ha pennañ damant TANABE oa an divezelezh hag e-doug e remzad e chomas e breder ahelet diouzh mennoz finvez mab den. Alese an dibab hentennel a

⁴ Sl. KIS-702 — An devoned hag eskoriñ, La-14, pp. 58-64, pp. 58-60 pergen.

¹ “NOTENNOU KEVREDADEL (5) : Kevredadouriezh a-zonder.” 8. “Ar greadoù-mañ, ouzhpenn ma ne zalc'hont ket kont eus ar patromoù hag argeloù strinkennet, hollekaet, skoueriekaet, o laka en arvar, o diskar, o c'has da get evit desezañ o sevenadoù en o lec'h. [...] Ken dic'hortoz all ha direoliek eo donedigezh ar greadoù strollennel-se. Krouus int e kement ma teuont a-benn da amparañ frammoù, patromoù, argeloù, sternioù, emframmoù peurnevet, da zigeriñ an hent etrezek talvoudoù ha kealioù strollennel na meizadet na buhezet c'hoazh” (*Emsav*, niv. 64, Ebrel 1972, p. 130, hervez Georges GURVITCH en e *Traité de Sociologie*, 1958-1960).

² Merkañ a reer ne spizan ket broadelezh ar Stad. Unan eo savelegezh ar galloud : ar galloudoùigoù a anavezomp e Breizh zo dindan an un amplegadoù ha galloud Paris. Ne lakaan ket anvioù kennebeut war al luskadoù yezhel, ar stourmoù renet war an dachenn hiziv o vezañ pe heklevioù da stourmoù kent pe, d'ar gwellañ, ur rakkerzh da stourmoù a vo soliet da vat er “greadoù nevezin ha krouin”.

reas adalek 1925 eus reizhiad HEGEL hag an hoal he devoe warnañ a-hed ar wech ar gristeniezh, kantaezet evel nes d'ar voudaegezh dre ar garantez a erbedont o div ouzh an nesañ. Ar pep souezhusañ eo ar strivoù a reas, ken abred hag er bloavezhioù tregont, evit adveizañ e zamkaniezh eus ar Stad, intret gant an hegeliadegezh, e termenoù kristen ha boudaek.

“Ar Stad [...] oa an hanterad etre an tralen hag ar c'heñverel. Gant hevelep priziadur eus ar Stad e voe kaset d'ar c'hlozadur e c'halle derc'hel enni he unan an holl amparoù eus kravezegezh mab den. Kement oa ha lavarout e tlefed gallout diren da gehelerezh ar Stad an holl furmoù gwitibunan eus an darempred etre tralen ha keñverel bezant er gravez yaadek. Tanabe a glaskas e brouñ a-geñver gant an div gravez a verme dezhañ ar muiañ : ar gristeniezh hag ar voudaegezh mahāyāna ¹.

“A-geñver gant ar gristeniezh e lakaas a-genstur ar C'hrist hag ar Stad rak loet heñvel edont o daou en etrewezhiñ an tralen hag ar c'heñverel. Dogm an Dreinded a dreuzlec'hias en triad « na-vout tralen-Stad-prederouriezh ar Stad » dre zeveizañ ar Spered Glan evel emgenskiant an handizhañ keveskemm etre an tralen hag ar c'heñverel ha dre zebazh ouzhpenn se ur staelad leteñvel da brederouriezh ar Stad. [...] Oc'h erlec'hiañ ar Stad ouzh Jezuz Krist, e c'halled diazezañ ar feiz poellel war sol gwirion he gwerc'hegezh. E se e tiree glan ha glez Tanabe an emskoueriañ diwar Jezuz Krist da wazerezh ar Stad.

“A-geñver gant ar voudaegezh mahāyāna , e prizias dreist pep hent all ar Bodhisattva e kement ma wele ennañ ar remed ouzh an tuadur d'an angwezhiañ a c'haller kavout dre vras er voudaegezh. [...] Hevelep karantez ouzh an nesañ naouus d'ar Bodhisattva a seller evel kenlabour an den da oberiezh ar Buddha ha war un dro evel prientidigezh d'e sklerijennadur e unan. Hogen evit Tanabe e oa ar Stad end-eeun oc'h erzerc'hañ an tralen bewech hervez an dro. Er c'heñver-se e tleed keñveriañ ar Stad ouzh ar Buddha e unan, hemañ oc'h erzerc'hañ bewech hervez an dro, evit

¹ Termen henindiek o talvout kement ha "hent bras" oc'h aroueziñ ur form a voudaegezh a gelenn doazhadur ar *Bodhisattva* ; hervez hemañ, beziadoù 'zo (*sattva*), denion pe doueoù, diraezet ganto stad an defroù (*bodhi*), kentoc'h eget bezañ dieubet diouzh an deberzh ha gounit staelad ar *buddha* ("arzelfraou"), a zibab goursezañ o mont tre en *nirvāṇa* dre gendruet ouzh an dud all a ambrougont evel ma rafe aelez mat.

skoazellañ ar re o deus ezhomm hag evel se dont d'ur skouer a Bodhisattva. Er ster-se e oa da zougen war un dro d'ar Stad ar bri dleet da gentpatrom ar mennoz eus hent ar Bodhisattva. Dre se e tiree ivez Tanabe ar c'hehelerezh boudaek ouzh ar Buddha d'ar c'hehelerezh ouzh ar Stad.”

“L'État [...] était le médiateur entre l'absolu et le relatif. Une telle évaluation de l'État conduisit à la conclusion qu'il pouvait contenir en lui-même toutes les dimensions de la religiosité de l'existence humaine. Et cela voudrait dire que toute forme de la relation entre l'absolu et le relatif qui se trouve dans la religion positive devrait pouvoir être réduite sans exception à la vénération de l'État. Tanabe tenta de prouver cela en rapport avec les deux religions qui lui importaient le plus : le christianisme et le bouddhisme mahāyāna .

“Eu égard au christianisme il établit le parallèle entre le Christ et l'État car tous deux prenaient une place analogue au sein de l'interaction entre l'absolu et le relatif. Il transposa le dogme de la Trinité dans la triade « néant absolu–État–philosophie de l'État », en ce qu'il interpréta l'Esprit Saint comme la conscience de soi de la médiation réciproque entre l'absolu et le relatif et il attribua en outre à la philosophie de l'État une place analogue. [...] En remplaçant Jésus-Christ par l'État, on pouvait fonder sa foi rationnelle sur la base réelle de sa propre effectivité. C'est ainsi que l'imitation de Jésus-Christ fut tout simplement réduite par Tanabe au service de l'État.

“Eu égard au bouddhisme mahāyāna , il pris au plus haut point la voie de Bodhisattva en tant que remède à la tendance vers l'inaction que l'on peut trouver d'une manière générale dans le bouddhisme. [...] Cet amour du prochain propre au Bodhisattva est considéré comme sa collaboration à l'œuvre du Bouddha en même temps que la préparation à sa propre illumination. Or pour Tanabe l'État était précisément la manifestation de l'absolu chaque fois selon l'occasion donnée. Sur ce point l'État devait donc être comparé au Bouddha lui-même, lequel se manifeste chaque fois selon l'occasion donnée, afin d'aider ceux qui en ont besoin et de servir ainsi d'exemple de Bodhisattva. En ce sens l'État devait du même coup jouir d'un respect en tant que prototype de l'idée de la voie du Bodhisattva¹. C'est ainsi que la vénération bouddhiste

¹ Keñveriañ war ar poent-mañ kelennadurezh TANABE gant hini Sant Paol : “Ra blego pep den d'ar re a zo e karg a-us dimp ; rak n'eus rener ebet na zeufe ket e c'halloud digant Doue ; ar galloudoù o ren eo gant Doue int bet diazezet ; er stumm-se, an hini a sav a-enep d'ar

envers le Bouddha fut également réduite par Tanabe à la vénération envers l'État¹.”

Alouberezh gwadek broioù an Habask ha drasterezh kêrioù Japan gant an nijerezh amerikan na voent ket re evit tennañ TANABE eus e reze. Anzav a rankas e oa eus ar Stadoù, Stad Japan pergen a lakae da eorizh, estreget ur gwerc'heladur eus an tralen hegeliel, kristek pe voudaek. Etre 1942 ha 1944 ez embregas un emzezrann boniek ha dre berzh an treañ a reas neuze e c'hoarvezas gantañ ur c'hwelad a anvas e unan un azrekaat, un andreñ. Diwar neuze e haeras ne c'halle ar brederouriezh nemet bezañ un *androouriezh* (Jp. *zangedō*, Sz. *metanoetics*). Deraouiñ a reas dre anzav fallentez e natur den ha troziadezh e oberoù. Dre ober hevelep kofesadenn e ouezas e chom an den dic'halloud da ren an azrekaat dre e nerzhoù e unan (Jp. *jiriki*) ha ne c'hell netra hep amoug ar Galloud Amgen (Jp. *tariki*). Diwar se e ranke e brederouriezh nevez loc'hañ diwar an andreñ, rak ne c'haller komz eus an andreñ nemet ent androadel.

“Pa 'z eo din peurandinac'h ne c'hell bezañ a brederouriezh nemet evel androouriezh, ne ra mui forzh din e saufe gouselloù ouzh va gweladur. Mar bez eno da 'm devezout abegoù meañsus o kammañ ergoregezh va denesaat, ez on me kiriek da se ha din me eo embrederiañ hag azrekaat evit se. [...] Bezet pe vezet, an dasselliñ androadel a 'm broud da emimbourc'hiñ penn da benn, da anaout an tuedoù mezhus a zo ennon ha da geuziñ dezho. Ur wech pleget da gement a oa rekis hag emouestlet da embreg an azreg (zange), e teuas davedon ur Galloud burzhudus a zivec'hias jahin va realoù mezhus hag a 'm leunias gant ur santad don a drugaregezh. An azreg zo, koulz lavarout, ur balzam war laur ar c'heuziñ ha, war un dro, andon ur sklerijenn dralen a laka ent diac'hinek an deñvalijenn da skediñ hep he argas. Buhezañ an degemer eus galloud treuzfurmus an azreg evel ur rad a-berzh ar Galloud Amgen zo, evel a welimp ent verr, mezon end-eeun an androouriezh. [...]

“Rezid mab den en e ster gwir zo guriziennet e rad an tralen. An kez rad a zinac'h hon bout war-benn hon andreñ d'ur bout nevez dre zefraouiñ ennomp an emskiant eus donded distrad hon

galloudoù-ren eo a-enep d'an urzh divizet gant Doue emañ o sevel” (*Lizher d'ar Romaned*, 13, 1-2, tr. br. dindan renerezh Maodez GLANNDOUR, Al Liamm, 1971, p. 379).

¹ HIMI Kiyoshi, id., pp. 105-106.

pec'hed ha dre se hon degas da anaout ez eo seurt rezid enganet an arbenn end-eeun eus hon diouer a rezid er ster diles, hag ez eo nac'hañ hennezh kement ha diogeliñ hemañ dimp¹. Bez' ez eo hepken pa emzinac'homp hon unan ha pa fiziomp hon bout e rad ar Galloud Amgen (tariki) e c'hell hon bezout piaouañ rezid diles. E berr gomzoù e c'hoarvez diastal ar vuhez a «vervel-ha-dasorc'hin».

“Since it seems to me an absolutely undeniable fact that philosophy is possible only as metanoetics, it no longer matters to me if my views arouse such suspicions. If there be some selfish motive in my thinking which distorts the objectivity of my approach, it is I who am responsible for it, and it is I who must reflect on myself and perform *zange* for it. [...] Be that as it may, metanoetical reflection urges me to examine myself completely, to recognize this shameful tendency within myself and to perform *zange* for it. Once I have submitted myself to the requirement and devoted myself to the practice of *zange*, I am met by a wondrous Power that relieves the torment of my shameful deeds and fills me with a deep sense of gratitude. *Zange* is, as it were, a balm for the pain of repentance, and at the same time the source of an absolute light that paradoxically makes the darkness shine without expelling it. The experience of accepting this transforming power of *zange* as a grace from *tariki* (Other-power) is, as we shall see shortly, the very core of metanoetics. [...]

“Human freedom in its true sense is rooted solely in the grace of the absolute. This grace negates our being in order to convert us to a new being by awakening in us a consciousness of the unfathomable depth of our sin and thereby leading us to recognize that this innate freedom is, in reality, the very cause of our lacking freedom in the true sense, and that only the negation of the former assures us of the latter. It is only when we forsake ourselves and entrust our being to the grace of *tariki* (Other-power) that our existence can acquire true freedom. In short, life consists of the continuous practice of « death-and-resurrection »².”

¹ Er c'hevarad-mañ e keveneb TANABE daou seurt *freedom* : an eil enganet, egile gwriziennet er rad. Anat eo n'emaomp ket pell aze diouzh an deologiezh kristen. Kentoc'h eget ober gant daou dermen, lakaomp dre virout Br. *rezid* e domani ar rad ha debarzh un termen all (Br. *frankiz*, *frankvennout*, *dizank* [sl. KIS-540, La-11, p. 216]...) d'ar *freedom* enganet, e 'm eus kavet furoc'h evit an ampoent heuliañ ar saozneg ha treiñ *freedom* dre *rezid* en daou zegouezh.

² *Philosophy as metanoetics*, id. (sl. a-zioc'h, p. 275, n. 2), pp. 1-5.

Lakaet er-maez un dave d'an tralen (*“the grace of the absolute”*), e tremen an digoradur d'an androouriezh hebiou da dermeneg ar brederouriezh. TANABE a zistroe d'ar poent mann hag a adc'hrae e brederouriezh en he fezh diwar ur wrizienn nevez. Koulskoude, mar emdamalle gant ruster a droziadezh divezel ha kefredel, e vane didorr e zehentadur donañ : goude disteurel adalek ar bloavezhioù ugent dodadoù HEGEL ha MARX a rae eus an den un deberzh en un dedro kenttonket, e oa deuet er bloavezhioù tregont da zamkanañ e fiziañs e mab den evit ren an istor etrezek trec'h ar poell — dilerc'h marksek — dre araez ar Stad — dilerc'h hegeliek. Ur wech skubet gant an darvoudoù ar gredenn denelour diwezhañ-se, ne chome gantañ sol ebet da harpañ e dreid. Gallet en dije skeiñ en hent a gemere dezevourion europat ar mare (HEIDEGGER, SARTRE, JASPERS), embann ivez adavidigezh mab den ha stigmañ ur c'heñver anistorek etre an dilested hiniennel hag an amzer pe ar peurbad. E androadur avat en degasas da vont hebiou da hevelep prederouriezhoù a 'n dic'hoanag. Ar re a studi TANABE, evel ma reomp amañ, n'int ket evit gwiriañ an danevell a ra eus an darvoud a voe an donedigezh dezhañ eus ar Galloud Amgen — darvoud unel c'hoarvezet e rin ur buhezadur. Koulskoude, da desteni dezhañ emañ, estreget an danevell, ar frouezh douget gant an daneveller ha stadadus gant an dud all en e realoù. Ha frouezh androadur TANABE zo ur brederouriezh a 'r goanag — na dro kein d'ar prederouriezhoù kent nemet evit o eilsammañ en ur feiz na anavezent ken.

“Evit komz fraezh, an tralen e kement ma 'z eo un « distreiñ da » 'r bed-mañ zo an nerzh luskedus da sevenidigezh hon andreñ. Met gwall bell e chom ar mennozioù kevrinel diouzh gwir savboent ar feiz evel m'en arbouez Shinran er kyōgyōshinsho ˘ :

“Na arc'houlit nepred hag Amida Buddha ho tegemer pe get : an argraf nemetañ eo ha kemmet hoc'h eus ho kalon pe get. »

“Heñvel dra, e konter istor an teologour protestant Karl Barth un deiz ma teuas un arvarour d'e atersiñ o c'houlenn ar brouenn eus galloud salviñ ar C'hris. Respont a reas dre lakaat a-wel n'eo ket salvet c'hoazh an hini a ra un hevelep goulenn. Amañ e welomp penaos e touch an hevelep kevrinoù kalon an doazherion gravezel bras ha pa vent a Reter pe a Gornog. Daoust ma n'on ket evit arvennout bezañ a live ganto, e c'hell bezañ heñvel a-walc'h an abegoù a 'm eus d'ober kel a andreñ.”

“Properly speaking, the absolute as a « returning to » this world is the motivating force behind our performance of *zange*. But mystical thinking remains far removed from the true standpoint of faith that Shinran stresses in the *kyōgyōshinsho* ˘ :

“ Never discuss whether Amida Buddha accepts you or not : The decisive question is whether you have changed your heart or not. »

“Similarly, the story is told of the Protestant theologian Karl Barth that he was once approached by a skeptical inquirer and asked to produce proof of the saving power of Christ. He replied by pointing to the fact that the one who was asking the question was not yet saved. Here we see how the same mysteries touch the hearts of great religious teachers both East and West. While I cannot presume to be on a level with these people, there may be some similarity in my motives for introducing *zange*¹.”

Prouennoù an andreñ, ar “c'hemmañ kalon”, zo da gavout er brederouriezh nevez a labouras da sevel adalek 1944 betek e varv e 1965. Ne zilezas hini eus dodennoù e brederouriezh kent, an doare d'o arwerc'hañ eo a oa disheñvel.

“Ne c'haller mui klask, e doare an derc'helouriezh hegeliek, lenn en istor guerc'heladur amzerel ar poell, e unan eztaol an tralen. Mar gell an istor merkañ un araokaat eus ar poell hag ar frankiz, ne c'hallo bezañ nemet dre berzh spered ar gouzrec'h, hini an den rez gouest da na-vout, eleze da nac'hañ ar werc'helezh graet ha barrek da zigeriñ war na-vout an dazont, da rakvuhezañ ar pezh n'eus ket anezhañ c'hoazh. Mar dle a dra sur mab den bezañ prederiet gant an tralen, ar peurbad hag ar poell en istor, e tle daveiñ dezho n'eo ket, en doare hegeliek-marksek, evel d'un tonkadur retvezek, met evel d'un dro vat da gemer hag ez eo eñ kret eviti. Ne c'haller mui sellout ouzh an istor diouzh ur savboent loet en diavaez pe dreist dezhañ, roet evel tralen, met dleout a reer gwezhiañ war an istor adal un engouestl a-ziabarzh, en dargouezh a 'r vuhez reveziat war an douar-mañ, a-greiz ar roadennoù istorel, devoudel ha soliadel [...]. Kement-mañ a ampleg ma ve adpiaouet an atebegzh divezel e kreiz an engouestl istorel. An kez adpiaouañ zo da raklakaat ouzh pep engouestl politikel strizh a-berzh ar prederour. [...] E se e klask Tanabe diouzh un tu astenn prederouriezh an hanvout gant un damant d'an istor ha d'ar politikerezh, met diouzh an tu all, en distro, e klask ebarzhiñ an damant hanvoudel (kirkegardek) da zivezelezh ar gouzrec'h er

¹ *Philosophy as Metanoetics*, id., p. 10. A-zivout SHINRAN, sl. KIS-726, La-14, p. 218, n. 4.

brederi istorel (hegelian) hag embregel (marksat) ouzh ster avantur stroll an denelezh. Hogen e kement-se, eo an unelezh eus hanvout mab den, me hag an hentez, an hini a zeu tevetek. Ar c'heñver ouzh an tralen ne c'hoarvez mui dre hantererezh ar seurtanvet tralended eus ar Stad pe eus ar Weltgeist met dre hent diabarzhded an hanveziad ha dre e geñver atebek ouzh an amgen. An tralen ne erzerc'h mui en hollc'halloudezh ar Stad met er galv o tont eus ar Peurall — ar « rad » hervez ar gristeniezh pe ar « Galloud Amgen » eus ar voudaegezh amida. Hemañ eo ar savboent nevez ma tleor dioutañ desellout dislavaroù ar vuhez kevredigezhel ha politikel. Diforc'hiñ a zleer pelloc'h an dleadoù politikel ouzh ar Stad diouzh an dleadoù kravezel ouzh an tralen, ha pa ve an doare ma sammer an atebegezhioù politikel un adsked eus an doare ma sevenser ar gred kravezel. Hep mar ebet, etre divezelezh kravezel an hinienn ha gwazerezh ar Stad e savo meur a genniñv hag a zislavar nevez : diwar neuze e strivo ar brederouriezh da asantiñ ma ve eus ar ratozh un dremmwel na vo diraezet biken, ur bukañ d'un arnesadur keñverel bepred, nepred peurgaset da benn.»

“Il n'est plus possible de vouloir, à la manière de l'idéalisme hégélien, lire dans l'histoire la réalisation temporelle de la raison, elle-même expression de l'absolu. Si l'histoire peut marquer un progrès de la raison et de la liberté, ce ne pourra être que par l'effet de l'esprit subjectif, celui de l'individu libre capable de néant, c'est-à-dire capable de nier la réalité établie et capable de s'ouvrir sur le néant de l'avenir, de vivre dans l'anticipation de ce qui n'est pas encore. Si l'homme doit certes se préoccuper de l'absolu, de l'éternel et de la raison dans l'histoire, il doit s'y rapporter non pas, à la manière hégélienne-marxiste, comme à un destin nécessaire, mais comme à une chance à saisir et dont la responsabilité lui incombe. On ne peut plus considérer l'histoire depuis un point de vue qui lui est extérieur ou supérieur, présenté comme absolu, mais il faut agir sur l'histoire depuis un engagement intérieur, dans l'ici-bas aléatoire de la vie réelle, au sein des données historiques, factuelles et positives [...]. Tout ceci implique une réappropriation de la responsabilité morale au sein de l'engagement historique. Une telle réappropriation est le présupposé de tout engagement proprement politique du philosophe. [...] Ainsi Tanabé cherche-t-il d'une part à donner à la philosophie de l'existence un souci historico-politique,

mais en retour il cherche à inscrire le souci existentiel (kierkegaardien) de la moralité subjective dans le souci historique (hégélien) et praxique (marxien) d'une préoccupation pour le sens de l'aventure humaine collective. Mais dans tout ceci, c'est bien l'unité existentielle de l'individu, moi et autrui, qui devient prioritaire. Le rapport à l'absolu ne se fait plus par le biais de l'absoluité prétendue de l'État ou du *Weltgeist* mais par le biais de l'intériorité existentielle et à travers son rapport responsable à autrui. L'absolu ne se manifeste plus dans la toute-puissance de l'État mais dans l'appel venant du Tout-autre — la « grâce » selon le christianisme ou la « force tierce » de l'amidisme. Et tel est le nouveau point de vue à partir duquel devront être abordées les contradictions de la vie sociale et politique. Les devoirs politiques vis-à-vis de l'État doivent désormais être distingués des devoirs religieux vis-à-vis de l'absolu, même si la manière de mettre en œuvre ses responsabilités politiques est le reflet de la manière dont sont assumés les élans religieux. Certes, le rapport entre l'éthique religieuse de l'individu et le service de l'État risque d'être jalonné de conflits ou contradictions nouvelles : l'effort de la philosophie sera désormais d'accepter que la résolution puisse n'être qu'un horizon jamais atteint, la visée d'une approximation toujours relative, jamais absolument réalisée¹.”

Deurus eo gouzout penaos e tedroas e gemez a r spesad goude androadur TANABE. Eno e oa bet, hag e chome, gwiridig e brederouriezh. Er bloavezhioù tregont en doa debarzhed d'ar spesad roll un hanterad gwerc'hek : ar vroad eo, e kement ha hevelepted kenelel, a oa al louer, andon da solwez an hinienn evel da solwez ar Stad ; desavelet oa an hinienn dre berzh ar spesad hag edo hemañ reizhwiriet, hollveziataet ha tralenaet gant ar Stad — meizadur diaes da zispartiañ diouzh kealiadur kefridiel an impalaerouriezh. Ur wech skarzhet an eriuenn vroadelour ez eo, anat, war geal ar spesad en devoe TANABE an trevell amjestrñ da ren. Derc'hel a reas da zisteurel goulun an hiniennegezh frankizour. Houmañ, o vrientekaat ar c'heñver etre Stad ha hinienn diwar-goust ar spesad, a lam digant hemañ e roll handizhañ hag a ro d'ar Stad an dro da gevanaozañ ur brizhspezad, ur spes a spesad, he doubleür peurc'houzañvat — plegenn a anavezomp mat gant ar Stad c'hall deuet a-benn (ac'hoel betek hiziv) da genaosañ ha da enderc'hel ur *Communauté nationale* ken berus hag an dour en un oglenn. Ne zistaolas ket enta keal ar spesad ha gantañ e wele bepred ur roll

¹ Bernard STEVENS, “De la praxis à la métanoia – La philosophie politique de Tanabe”, *É. P.*, n^{os} 31-32, 2000, pp. 202-203. STEVENS a ra un diverrañ eus levri TANABE : *Tetsugaku nyūmon* (*Digoradur d'ar brederouriezh*), 1949-1952, hag eus an dezvarnerezh a ra anezhañ Johannes LAUBE en e levri *Dialektik der absoluten Vermittlung*, Herder, 1984.

hanterad ; koulskoude ez emgave tuginet ar vleinegezh : ar spesad, o tougen hevelepted ur bobl, a gav e gefleuniadur, n'eo mui er Stad, met en hinienn ; an hinienn eo al louer, ha hi zo graer diles an istor : dre an daelerezh etre an hinienn en he rezid hag ar spesad evel load ar mad kevredin e tispak ar sevenadur. En ur ger, e tistaol an devoned hegiat ha marksat a zire an istor d'ur savelegezh koulz hag an dargouezh hanvoudelour a gondaon mab den d'an amodelezh.

*“Bez' e c'hellomp enta derc'hel da wir e wiskas ar spesad un neuz nevez diwar neuze. Diagent e veze intentet evel unvez vevañ kezivik dre berzh e gentizhegezh, e anpoellegezh hag e zanvezeg-
ezh. An desaveladur nevez, en eneb, en diskoueze en e ampar
speredel, sevenadurel. Evit eren kewer an daou arvez-se eus
ar spesad, e rankomp degas e penn kont elfenn ar c'hwelad
(Al. Wendung) bezant e kemez ar spesad.*

*“Dre ma talvez metanoia kement ha peurandreiñ, e rank kemez
ar spesad enderc'hel ivez un elfenn c'hweladek adalek m'he
gweler e diarsell an androouriezh. Ar genad, an hollveziad evel na-
vout tralen, a naou da gentañ penn evel an nac'hadur groñs a nep
beziad keñverel, nemet ez erzerc'h pa gar evel karantez a
gendruez, o pardonñ d'ar c'heñverel hag ouzh e salviñ. Setu perak
e c'haller naouusteriñ e c'hweladegezh evel « na-vout-e rezh-
karout » (Jp. mu soku ai) pe « nac'hañ meur-e rezh-truez veur »
(Jp. taihi soku taihi). Leiaet e vez an hinienn betek ar poent
ma vez kaset da get an an-un a voe he hini betek neuze. D'ar
poent dik-se ez eo distroet d'ur vuhez nevez hag, e gvirionez,
uheloc'h. An kez c'hweladegezh zo enta eus ar rizh loc'hañ a
c'haller aroueziñ evel « mervel-ha-dasorc'hiñ » (Jp. shifukkatsu)
pe, gwelloc'h c'hoazh, dre dermenoù kemezel e-giz « na-vout-
e rezh-bout » (Jp. mu soku u).”*

“Nous pouvons donc établir que l'espèce manifesta désormais un nouvel aspect. Précédemment elle avait été saisie en tant qu'unité primitive de la vie à partir de son immédiateté, de son irrationalité et de sa matérialité. La nouvelle détermination, par contre, la révélait dans sa dimension spirituelle, culturelle. Afin de rapporter équitablement l'une à l'autre ces deux implications de l'espèce, nous devons porter notre attention sur l'élément du « revirement » (*Wendung*) contenu dans la logique de l'espèce.

“Du fait que la *métanoïa* signifie la conversion absolue, la logique de l'espèce doit alors également impliquer un élément du revirement pour autant qu'elle soit vue dans la perspective de la métanoétique. Le genre, l'universel en tant que néant absolu, apparaît tout d'abord comme négation absolument impitoyable de tout être relatif, mais il se manifeste quand il le veut comme amour compatissant, qui pardonne au relatif et le sauve. C'est pourquoi son aspect de revirement peut être caractérisé en tant que « néant-*qua*-amour » (Jp. *mu soku ai*) ou « grande négation-*qua*-grande pitié » (Jp. *taihi soku taihi*). L'individu est amoindri jusqu'à l'anéantissement complet du soi qui a été le sien jusque là. Et c'est à ce point précis qu'il est ramené à une vie nouvelle et en vérité plus haute. Cet aspect du revirement représente donc un type de mouvement qui peut être désigné comme « mourant-ressusciter » (Jp. *shifukkatsu*), ou mieux encore en des termes logiques tels que « néant-*qua*-être » (Jp. *mu soku u*)¹.”

Hag ar Stad en afer ? a c'houlenner. War a hañval ne bledas ket TANABE ent hir ganti da c'houde e androidigezh. Kefridi ar Stad oa bepred gwerc'helaat an hollveziadelezh dre frammañ ar bobl e rezh ur gevrediniezh, dre verañ ar vro war ziazez an darempredoù a vreudeuriezh. “*Hervezomp, e se e teuas [Tanabe] da gomz eus ar Stad japanat evel eus ur wir « res publica », ha pa ve bet ar mennoz-se o c'houzañv levezon an derc'hadurioù hengounel eus furm ar Stad japanat a chomas stag betek ar fin ouzh dezevout e brederouriezh*².” Bezet pe vezet, prederietoc'h e veze e genvroiz gant ar c'henderc'hañ armerzhel eget gant an andreñ. Ouzhpenn e brederouriezh, en doa Kornog profet da Japan e sujidigezh d'ar c'halvezerezh ha d'an helv — “nihilouriezh” e sevenadur, hervez troienn HEIDEGGER — ha TANABE a varvas hep gouzout, pa vezer prederour, “penaos e c'haller perzhiañ en istor”.

TANABE oc'h ober anv eus “ampar speredel, sevenadurel” ar spesad (ha pa ve intentet hemañ evel broad, tudad, kenel pe all) a ro dimp da soñjal er skridoù a embannas Maodez GLANNDOUR war *Studi hag Ober*¹ hag en e levr dalif *Kregin-Mor*². An diforc'h etre an daou aozer a denne moarvat d'an amveziadoù istorel, ar Japanad o taveñ d'ur

¹ HIMI Kiyoshi, id., p. 112.

² “Nous sommes d'avis que cela le conduisit à parler de l'État japonais véritablement comme d'une « res publica », même si cette idée devait souffrir des représentations traditionnelles de la forme de l'État japonais qui restèrent attachées jusqu'au bout à sa pensée philosophique” (HIMI Kiyoshi, id., p. 113).

¹ Sl. KIS-729 – A-zivout speredegzh, La-14, p. 263-273.

² Maodez GLANNDOUR, *Kregin-Mor*, Al Liamm, 1987.

vroad frammet gant ur Stad ungenezh dezhi, ar Breizhad o taveiñ d'ur vroad hogos galloudel sterniet en ur Stad bet ganet gant ur vroad all. An diforc'h pennañ eo dreist-holl e klaskas TANABE reiñ d'ar vroad un diazez speredel endra roe Maodez GLANNDOUR d'ar spered un diazez broadel.

E troadur kentañ e gemez a 'r spesad e roe TANABE d'ar spered furm ar poell : an tennder etre an daou anpoell ez eo ar vroad hag an hinienn a gave e zisoc'h dre an disgorren er Stad, sez ar poell ; ar Stad oa dezhi da arvez gwerc'hel ar vroad e kement ma 'z eo houmañ an diazez eus *Dasein* kevredigezhel an den, da arvez derc'hel an hinienn e kement ma 'z eo hi gouzrec'h ar frankdivizout ; dre ar Stad enta e kave broad ha hinienn digor en hollveziadel. En e eil troadur, ez anzavas TANABE ne c'halle nag ar poell, nag ar Stad, na galloud den (Jp. *jiriki*) ebet ditouriñ kerzh mab den — hemañ a rank ober e istor hep gouzout a belec'h na da belec'h ez a : an tralen n'en deus mui furm ar Stad enkorfet er vroad, emañ er Galloud Amgen a-drehont (Jp. *tariki*), er rad, a sklerijenn an hinienn dre an andreñ ; da heul o androidigezh e stourm an hiniennoù da buraat ar vroad hag ar Stad diouzh frouezh an oberoù sevenet a-raok an andreñ endeeun, peurgetket dre gemer ar gendruer, ar gewerded da finvezioù ar gedvuhez ; merkomp e chome gant TANABE ar vroad — spisoc'h : an unvez kenelel — ur solwez kentañ andireadus da solwez an hinienn. E nep lec'h, war a hañval, ne ebarzhas en e gemez a 'r spesad ur gemez eus bezout ar broadoù, eleze eus arbennoù istorel ha kevredadel o ganedigezh, o dedroidigezh hag o steuzidigezh.

Breizh avat n'eo ket Japan ha prederi Maodez GLANNDOUR a voe da gentañ penn ar bout pe an na-vout eus ar vroad vrezhon. Gougevanet e oa bet Breizhiz ouzh ur Stad a zianaveze ar broadoù evel solwezioù louet hag a intende amparañ un hennad broadel en arun ganti he unan — e lec'h all ez eo bet lakaet a-wel an dislavar a voe diwar an derou etre ur Stad mennet da arc'hwelañ en amgant an denelezh a-bezh hag he amgant devoudel, ar genel c'hall, o kondaoniñ ar c'helenioù all d'an dic'henezhiñ ha d'an dec'henezhiñ. Ken e kemeras Maodez GLANNDOUR da gefridi haeriñ gwir Breizh da ensammañ he zonkadur, en ur ziskuliañ ankewerded ar Stad c'hall he dianavez evel broad hag a striv abaoe daou gantved da zeheñvelaat Breizhiz ouzh he fenngeneral. Penn da benn e remzad e voe divrall e feiz vroadel : “*Gouzout a reomp evit petra e stourmomp. Mar bez goulennet ouzhimp, e respontomp evel just : Evit Breizh !*”¹ “[...] morse ne varv an istor : adstrinkañ a ra war varr goude kantvedoù hiroc'h pe verroc'h, a-wechoù goude milvloavezhiadoù. Met dont a ra en-dro : evel pa vefe retderioù didrec'hus o tont eus an douaroniezh, pe eus ar poblañsoù. E-pad ur pennad e c'hellont bezañ mouget, moustret gant nerzhioù enebour : met ne vezont ket lazhet.”² Ha rezal a ra dazont ur Vreizh mestrez warni he unan, lamet diwarni ar galloud estren ha, war un dro gantañ, an holl sioù a rebech da ved ar mare. Boutin etrezañ ha TANABE emañ dodañ

¹ *Kregin-Mor*, id., p. 17.

² *Kregin-Mor*, id., pp. 250-251.

ez eo ar vroad — spisoc'h : ar genel — ur solwez louet andireadus d'an hinienn ha d'ar Stad ; ivez anaout d'ar vroad un “ampar speredel, sevenadurel” na c'haller kavout na gant an hinienn, na gant ar Stad. E gwir, nag an eil nag egile ned a pelloc'h e zoazhadur a-zivout ar vroad. O daou e tougont ur sell feizel war ar gevredigezh, Maodez GLANNDOUR o welout er vroad vrezhon ar gwarant da drebadezh an talvoudoù kristen hengounel, TANABE o lakaat andreiñ an hinienn evel amplegad treuzfurmidigezh ar vroad hag ar Stad (diwar vont, pa geñverier skridoù an eil hag egile, ez eur techet a-wechoù da atersiñ : piv ar c'hristen eus an daou ?).

Na TANABE, na Maodez GLANNDOUR ne zisoc'has gant un doazhadur prederouriel gwerc'hek eus ar vroad. TANABE, goude stadañ anpoell ar vroad, a glaskas da gentañ reiñ dezhi he roll e gwerc'heladur ar poell tralen dre vezañ sol danvezel ar genad hollveziat e oa ar Stad ; da eil, o loc'hañ diwar devoud speredel an andreiñ, e tebarzhas d'ar vroad ar gefridi bezañ rakfurm an Douar Glan³. Hogen da c'hraerion bolitikel hag armerzhel e amzer ne c'halle hevelep ditouroù nemet bezañ utopek — PLATON araozañ a anavezas an hevelep saviad ; ken dinoaz e oa TANABE avat ma voe lezet da echuiñ e vuhez e peoc'h ouzh tostal e venez. Maodez GLANNDOUR o loc'hañ diwar devoud istorel diverkadur Breizh eus ar gartenn, a ziarc'h he gwir da zistreiñ, a ziougan he dasorc'h istorel, hep un derou a zezrann prederel war an dislavar o klaviañ e savlec'hiadur : stourm evit un anpoell diwar-bouez pennaennoù ar poell — pennaenn an hevelepted pergen, an hini estrenañ d'ar rezid¹.

STAGADENN E-GIZ KLOZADUR

Evit TANABE da vezañ heziraesoc'h dimp, emañ ken nec'het e dibenn an tregont pajenn-mañ ha ma voen oc'h echuiñ an notenn diwar-benn NISHIDA. C'hoarvezout a ra din adlenn pe dizoleiñ testennoù gant pe war TANABE ha merzhout a ran an toulloù bras a chom e 'm studienn. Biskoazh ne vuhezis ken splann ar saviad deskrivet alies er Brederouriezh : bezañ deraouad bepred. Ne garfen ket diskregiñ koulskoude hep reiñ un arroud eus *Ar Brederouriezh evel Androouriezh*², a-zivout ar rezid end-eeun, a dennan eus ar chabistr 4 : “Androouriezh ha prederouriezh ar rezid³”.

³ An Douar Glan (Jp. *jōdo*), e hengoun ar voudaegezh amida, oa ur baradoz loet er C'hornog ma oa aes diraez ar voudaelezh ; dodenn a c'haller nesaat da Tir na n-òg pe da Jeruzalem neñvel.

¹ Sl. KIS-516 – Pennaenn an arun, La-11, pp. 51-64.

² *Philosophy as Metanoetics (zang edō toshite no tetsugaku)*, sl. p. 282 a-zioc'h, n. 1.

³ “Metanoetics and the Philosophy of Freedom”, pp. 116-150.

“E Henc’hres, ne veze ket *deur bras gant kudenn ar rezid*⁴. He *frederouriezh a blede da gentañ gant an natur hag alese a zispakas e rezh ur brederouriezh a 'n natur pe drabedoniezh, a voe he amkan blein imbourc'hiñ pennaennoù ar boud hag o luniadoù ster. Diwezhatoc'h e teuas da bleustrañ war gudenn mab den, hogen eno zoken e voe he *deur pennañ an dud er geoded. Ne daole ket evezh bras ouzh an den evel hinienn, eleze, ouzh ar person evel gouzrec'h ar rezid. Er prantadoù diwezhañ zoken eus ar brederouriezh c'hresian, pa voe bet linket ar sti trema frankizadur an den, e vanas divarrek da sevel argraf gant mennoz ar rezid. Kement-mañ a gendaolas kenan d'an devoud ne voe ket prederouriezh an istor evit diwanañ e Gres. Ar « boud », hag eñ dezevet evel elfenn orin pe davedenn pe bennaenn an urzh en natur a weled e rezh anienoù digemm, tra ma selled anadoù an natur, hag int hepken, evel o vezañ en un argerzh strummañ ha kemmañ trebadus. En disoc'h, ar reizh gresian ne dizhas nepred emskiantañ ouzh keal an istor evel diorren krouus en e zaou gemeradur a azfurmiñ, anezhañ ur sankañ boniek e-barzh an dazont, hag a azneveziñ, anezhañ un distreiñ etrezek an orinoù tremenet. Souezh ebet ne ve ket deuet keal ar rezid evel pennaenn c'houzrec'hel — a emgenskiant hanvoudel — eus an istor da vezañ unan eus deurioù meur ar brederouriezh c'hresian.**

“*Gant ar Gristeniezh e tegouezhas argraf ar rezid er rakleur. Unan eus an doareoù naouus d'ar Gristeniezh eo he gweladur a 'n istor evel argerzh denel o teraouiñ gant ar c'houezhañ (bet kevaraezet gant ar rezid), o kenderc'hel e skeud ar varn douget gant Doue ouzh pec'hed an dud, o kas da adunvanadur an denelezh gant Doue dre berzh marv Jezuz Krist. Doazhadur ar rezid ha prederouriezh an istor dec'hanet gant ar preder kristen a wezhias un dispac'h boniek en hengoun speredel gresian. Diwezhatoc'h, pa voe erlec'hiet ar preder frankizour modern ouzh an arbouez en doa ar preder krennamzerel roet da aotrouniezh an Iliz ha pa voe anavezet ar rezid evel amparus da anien mab den, e voe lakaet damkaniezh ar rezid da zerc'hel al lec'h kreiz e bed ar*

⁴ Un alberz eus ar c'hudennoù a sav pa vez da dreiñ Sz. *freedom* hon eus bet c'hoazh, sl. p. 296, n. 1a-zioc'h.

brederouriezh. Savboent prederel ar voudoniezh hollek, anezhañ merk ar Grennamzer izel, a steuzias e gounid savboent an emgenskiant gouzrec'hel-hanvoudel. Rak se, an imbours'h war natur ar rezid a zeuas da vezañ unan eus kudennoù kreiz ar brederouriezh vodern.

“Padal, ken dreistgavael ha biskoazh e van dinoadur orin ar rezid. N'eus ket eno un danvez da vezañ diluziet dre hent an dezren o vezañ m'en deus ar gouziadur dre berzh e natur end-eeun d'ober gant ar beziat¹ ; hag ar rezid, evel ma 'm eus bet tro da zisplegañ c'hoazh e sigur keal an deberzh, ned eo ket angorzhet gant ar beziat a zo. Ar rezid ne vez gwerc'helaet nemet a-dreuz un ober krouiñ boulc'het en na-vout ha loet en dazont ; un ober emdarzhek rik ez eus anezhañ o tispakañ diouzh an na-vout. Dodet e termenoù furlmel, ez eo ar rezid an emdarzh eus youl mab den handizhet dre an na-vout ; pe devred emdarzhek an an-un oc'h emsujañ e unan a youl gaer d'an na-vout ; pe emdarzh ar beziad keñverel oc'h emsujañ e unan a youl gaer d'an tralen hag e se o vezañ treuzfurlmet en un handizher a 'n tralen ; pe emsaveladur an den personel sentus ouzh Doue. Doue, e kement ma 'z eo tralen, n'eo ket bout, met na-vout, dre se an ober sujañ pe sentiñ a zo hini ar rezid zo anezhañ un dibab emdarzhek hag emsavelus a-berzh an den personel, hep ket a argrennad diavaez. An den hinienn a c'hounez rezid a-dreuz handizhad Doue, endra vez Doue en eskemm gwerc'helaet hag erzerc'haet a-dreuz rezid an den. Diouzh an handizhañ tralen-se eo e tinod ar rezid. Holl zamkaniezhoù spesadel ar rezid bet danzeet a-c'houde Eosten zo handizhañ an na-vout tamm pe damm en o mezon.

“N'eo ket ar bout enta, met an na-vout eo a vast un diazez d'ar rezid en den, ul load ma vez amparet ar youl. Ar gudenn vrasañ gant damkaniezhoù ar rezid eo an tuadur boas da dremen dreist argraf an na-vout penn da benn. Ar c'hantouezañ kentizhek n'eo ket evit testiñ an na-vout ; kement a oufe bezañ kantouezet a-gentizh, pe nadet ent ergorel, zo d'ar bout, n'eo ket d'an na-vout. Rak se, goulakaat e c'hell ar rezid bezañ gavaelet dre un nadiñ

¹ Hervez ar c'hemeradur e troan Sz. *being* dre Br. *bout, boud, beziat, beziad*. A-zivout Br. *bout, boud, beziad*, sl. La-11 passim ha KIS-534, pp. 179-187 pergen ; a-zivout ar c'hemm etre ar *beziad* hag ar *beziat*, sl. KIS-706, La-14, p. 92, n. 2.

amgevredus zo kevatal d'ober anezhañ ur beziad ha da heul lemel digantañ e natur anienel evel na-vout.”

“In ancient Greece, the problem of freedom was not a matter of great concern. Its philosophy was primarily concerned with nature and hence grew into a philosophy of nature or metaphysics, the main purpose of which was to investigate the principle of being and their structures of meaning. Later it came to deal with the problem of the human, but even there its chief concern was with humanity in the polis. It did not give much attention to the human individual, that is, to the person as the subject of freedom. Even in the final stages of Greek philosophy, when the focus had shifted to human emancipation, it was still unable to bring into question the idea of freedom itself. This in turn had a profound bearing on the fact that the philosophy of history was not able to come into its own in Greece. The « being » thought to be the primary element or purpose or principle of order in nature was viewed in terms of unchanging essences, while only the appearances of nature were seen to be in a constant process of flux and change. As a result, the notion of history as creative development, in the double sense of a *reformation* that represents a radical thrust into the future and a *renovation* that returns to past origins, did not reach full consciousness in the Greek mind. It was only natural that the notion of freedom as a subjective — existentially self-conscious — principle of history did not become one of the major concerns of Greek philosophy.

“The issue of freedom came to the fore with Christianity. One of the distinguishing features of Christianity is its view of history as a human process that begins with the Fall (occasioned by freedom), continues under the shadow of divine judgment against the sin of humanity, and leads to the reconciliation of humanity with God through the redemptive death of Jesus Christ. The doctrine of freedom and the philosophy of history produced by Christian thought effected a radical revolution in the Greek spiritual tradition. Later, when the emphasis that medieval thought had put on the authority of the church was replaced by modern liberal thought, and freedom came to be recognized as constitutive of the essence of the human, the theory of freedom was made to occupy a central position in the world of philosophy. The philosophical standpoint of general ontology that had marked the late Middle Ages shifted to one of subjective-existential self-consciousness. In this way, the inquiry into the nature of freedom came to represent a central problem of modern philosophy.

“Proof of origins of freedom, however, remain as elusive as ever. It is not a matter to be solved by deductive inference since knowledge by its very nature has to do with being ; and freedom, as I have already explained in speaking of the notion of contingency, is not concerned with preexistent being. Freedom is realized only through creative action initiated in nothingness and located in the future ; it is absolutely spontaneous action developing out of nothingness. Put in formal terms, freedom is the spontaneity of human will mediated by nothingness ; or the spontaneous decision of the self voluntarily submitting itself to nothingness ; or the spontaneity of relative being voluntarily submitting itself to the absolute and thus being transformed into a mediator of the absolute ; or the self-determination of the human person obedient to God. Since God, as the absolute, is not being but nothingness, the act of submission or obedience that belongs to freedom represents a spontaneous and self-determining choice on the part of the human person, with no external restrictions. The human individual gains freedom through the mediation of God, while God in turn is realized and made manifest through the mediation of human freedom. It is out of this absolute mediation that freedom arises. All specific theories of freedom elaborated since the time of Augustine contain some such mediation of nothingness at their core.

It is not being, then, but nothingness that provides a foundation in the human for freedom, a locus at which the will is constituted. The main problem with theories of freedom is the usual tendency to pass over the whole question of nothingness. Nothingness is not something to which immediate experience can attest ; whatever can be experienced immediately, or intuited in objective terms, belongs to being, not to nothingness. To suppose therefore that freedom is capable of being grasped in an act of comprehensive intuition is tantamount to turning it into being and thus depriving it of its essential nature as nothingness¹.”

¹ *Philosophy as Metanoetics*, id., pp. 116-118.

Trugarekaat a zlean Bernard Stevens, sekretour skridaozer ar gelaouenn *Études Phénoménologiques* embannet gant an institut supérieur de philosophie e Louvain-la-Neuve, da gentañ evit ar studiennoù kaer en deus savet war Skol **Kyōto** ha war Tanabe Hajime pergen, d'an eil evit ar skoazell en deus roet din e 'm imbourc'hioù.